

**Plac'hik diou vech demezet**

Me neva ur leve bras  
 Deus peurs m'ha mam ha m'ha zad  
 a n'he voa forz dezi  
 Red he voa d'hin labourad.

P'ha moamp hon daou laret  
 hon rezon an eil d'egile,  
 ar c'havalier neus laked  
 war ma bis, ar goalen promesse.

— Dallet plac'hik yaouank  
 eur goalen ak ur sayen  
 miret he em memor  
 Allaoured eo hen daou pen.

M'he ia breman d'an arme  
 Allas red eo din monet  
 Aben m'ar t'hin d'ar ger  
 C'houi vo martreze eureujet.

M'ha c'halon, a nem roas  
 ho klevet he prepozou  
 ha n'hin d'ha poam laret  
 he vijamp bed priejou

Adieu he laraz d'hin  
 Fantik ar koeffen melen  
 Sul vech hen ho sellan  
 he rejouiss m'ha c'halon

m'he vo fidel d'am ger  
 Plac'h yaouank bed d'oc'h-hini  
 Lakas he rez an termen  
 he vije deud d'am eureuji

P'eo arru an termen  
 Allas m'he moa bed kelou  
 M'he zo bed kontraignet  
 D'ha kemer pried er bro.

M'ha lez mam ha m'ha tad  
 ho deus han dim he choazet  
 Pinvidik ha lignes mad  
 Allas, m'he n'en karen ket.

Peo achu an euret  
 Ed he voa an dud d'ho gwele,  
 Amzer goan kalet,  
 N'he woa den woar ar bale.

Voar an nor deus ar maner  
 Ur tol a zo bed skoet  
 Digoret, emei ur vouez  
 gant ar vreg anavezet.

M'he n'ha digorrin an nor  
 N'ha dac'h, na d'ha zen abed  
 M'he a zo em goele  
 hen tal ki chen m'ha pried

Digoret d'hin an nor  
 Plac'hik diou vech demezet  
 ho terc'hel brid m'ha marc'h  
 M'ha daouarn a zo skorned

ho terc'hel brid m'ha marc'h  
 ha m'ha kleze allaoured  
 m'ha treid ebars ar skeiou  
 gant an erc'h a zo skorned

Voar pont an aradon  
 m'ha p'ha woan m'he ho tremen  
 m'he kleve ar sonnerien  
 ho sonn evit hor euret

Ur dra ha lare d'ham c'halon  
 Kollet eo d'ha muyan karet  
 Ankouet he deus ahanoud  
 kemeret he deus ur pried

— M'he n'ha digorrin an nor  
 N'ha dac'h n'ha da den abed  
 N'ha ma ve klevet trous

Allas, m'he ve gourrouzet.

han noz a zo d(e)ued  
 ha m'ha dor a zo serret  
 m'he zo hen noz kenta  
 hen tal kichen ur pried

Ed-hu d'an aradon  
 Enon c'houi a vo lojet  
 Varc'hoas p'ha vo deiz  
 m'he iello d'hi d'ho koëlet

Ag ha gasso gan-hin  
 kluzuri ha kabonet  
 Ag ur boutaillad gwin  
 evit m'ha devez prenet

Ed-hu dan aradon  
 enan c'houi ha vo lojet  
 Ag ur marchossi kaer  
 evit lakat ho ronset

ur gwele mad ha plün  
 enan ho po d'ha kousket  
 var c'hoas p'ha vezo deiz  
 m'he iello d'hi d'ho gwelet.

Fenoz d'an aradon  
 M'he non ket evit monet  
 ha m'ha pajik bihan  
 hen hent a zo bed marved.

Aben m'ha moa tappet ker  
 he voa ed an dud d'ha kousket  
 An amzer a zo kri  
 ha m'ha paj emeus kollet.

( incomplète )

*Sur le folio 208 r.: les deux vers qui commencent la pièce (f. 208 v.)  
 sont donnés comme titre :*

*Digoret d'hin an nor  
 Plac'hik diou vech demezet.*